

KAIEROU

KENVREURIEZ AR BREZONEG

KAIER N° XI

Miz Du 1970

Cahiers non périodiques. Souscription pour 500 pages : 12 F.

C.C.P. 193.17 Nantes, Chanoine Nédélec (Ker-Anna, 29 S Quimper).

Ce numéro commence la 2e année; pensez à souscrire.

SKRITUR ZAKR EN OVERENN hag OREZONOU evid an Azvent ha goueliou Nedeleg.

Sul kenta an Azvent	Paj. 1 - 3
Eil sul an Azvent	4 - 7
Trede Sul an Azvent	8 - 11
Pevare sul an Azvent	12-15
Derhent Gouel Nedeleg, overenn an abardaez	16-20
Orezonou an teir overenn da Nedeleg	21-22
Gouel Nedeleg: Overenn hanter-noz, pe ar Pellgent	23-25
- d° - - goulou-deiz	26-27
- d° - - an deiz	28-30
Gouel ar Famill Zantel (d'ar zul goude Nedeleg)	31-34
Gouel Itron Varia Gerzu: ar Werhez Vari krouet dinamm	35-38

Troidigeziou aotreet da arnod, evid an eskopti,
a-berz an Aotrou F. Barbu, Eskob Kemper ha Leon.

Kemper, d'ar 6 a viz Du 1970.

+ V. Fave, eskob-skoazeller.

N.B.- Priz ragprena ar Haierou a zo savet euz 10 da 12 lur. Ne vo
souezet den ebed, moarvad. Ar re o deus paeet dija (rouez int,
e gwirionez) a lavarom dezo "Bennoz Doue", ha mad eo.

SUL KENTA AN AZVENT - Bloavez C -

Lennadenn Ia. - Klevom ar bromesa grêt gand Doue da zigas
eur Zalver hag a vo euz lignez David.

PENNAD EUZ LEVR AR PROFED JEREMIAZ (33/14-16)

14. Lavar an Aotrou Doue eo: Setu deiziou o tond, ma tigasint da wir
ar gomz vad am eus bet lavaret da diegez Israel ha da diegez Juda.
15. En deiziou-se ha d'ar mare-se, e lakint da ziwan da Zavid
eun hadenn euz e wad: leun a justis e vo,
ha lakaad a ray da rén ar gwir hag ar justis dre ar vro.
16. En deiziou-se, e vo salvet Juda, ha Jeruzalem a vevo dienkrez,
hag evelhenn e vo anvet kêr: "An Aotrou just ha mad evidom".

SALM 24 / 4bc-5ab, 8-9, 10 & 14.- Diskan: Warzu ennoh... ("An Overenn", p. 38)

4. Grit din anaoud hoh heñchou, Aotrou Doue; deskit din ho kwenojennou.
5. Grit din kerzed ouz sklerijenn ho kwirionez, ha kelennit ahanon,
rag c'hwi eo va Doue salver.
8. Mad ha reiz eo an Aotrou; rag-se d'ar beherien e tiskouez an hent eeun.
9. Rén a ra an dud izel da heulia bolontez Doue,
deski 'ra d'ar re izel e heñchou dezañ e-unan.
10. Heñchou an Aotrou n'int nemed madelez ha fealded,
evid an dud a zalh d'an emgleo gantañ ha d'e lezenn.
14. Eur mignon eo an Aotrou evid ar re a zouj anezañ;
hag e lezenn a ro dezo d'o sklerijenna.

Eil Lennadenn. - An Abostol a ro ali d'ar gristenien
da vond atao war wellaad, evid beza prest
a-benn donedigez Or Zalver.

PENNAD EUZ LIZER KENTA SANT PAOL DA GRISTENIEN TESSALONIK (3/12- 4/2)

12. Va breudeur, plijet gand an Aotrou Doue ho karga heb muzul
a garantez kenetrezh hag e keñver an oll,
koulz ha ni en ho keñver.
13. Plijet gantañ delher stard ho kalonou,
deoh da veza direbech, er zantelez, dirag Doue, on Tad,
a-benn donedigez Jezuz, on Aotrou, gand e oll zent.
- 4/1. Setu eta, va breudeur, e reom ouzoh
ar goulenn hag ar bedenn-mañ en Aotrou Krist:
evel m'ho peus desket ganeom penaoz rén ho puez
evid plijoud da Zoue, - hag hen ober a rit dija -
grit c'hoaz, hag atao gwelloc'h.
2. Rag gouzoud a rit mad peseurd gourhemennou on eus roet deoh
a-berz an Aotrou, Jezuz Krist.

SALUD D'AN AVIEL. - Alleluia! Diskouezit deom, Aotrou, ho madelez,
ha digasit deom ho silvidigez. Alleluia!

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ (21/25-28, 34-36)

En amzer-se, e lavare Jezuz d'e ziskibien:

25. "Bez' e vo sinou burzuduz en heol, el loar hag er stered;
ha war an douar, gwall aŋken a wasko ar poblou,
nèhet ma vint gand trouz ar mor ha fraill an tarzou,

26. kén na vo an dud trohet o alan gand ar spont,
er gortoz euz ar pezh a hoarvezo gand ar bed a-béz,
rag brañsella (pe: horjella) 'raio astrou an neñv.
27. Neuze e vo gwelet Mab an den o tond er goabrenn (pe: er goumoulenn),
gand eur braz a halloud hag a hloar. (pe: leun a halloud...)
28. Pa vo kement-se krog da hoarvezoud, en em lakit sonn ha savit ho penn,
rag tostaad a ra ho silvidigez.
34. Evidoh hoh-unan, diwallit na ve morzet ho kalonou
gand an debri hag an eva re, ha gand nehamanchou ar vuez,
ha na zeufe an deiz-se warnoh dre laer, evel eur roued d'ho paka,
35. rag koueza 'raio war an oll dud o veva war an douar a-bez.
36. Chomit eta war zihun, o pedi e peb amzer,
evid beza e stad d'en em denna euz an oll draou-se a zo da zond,
ha d'en em gaoud dirag Mab an den.

===== OREZONOU (diwar "Missale Romanum" 1970) =====

- 1) Pedom Doue... - Ho pedi a reom, Doue oll-halloudeg, roit d'ho tud fidel
ar hoant gwirion-mañ: da vond leun a oberou mad en arbenn d'ho Salver
pa zeuio, evid beza plasat a-zeou en e gichen, ha kaoud perz gantañ
e rouantelez an neñv. - Drezañ, ho Mab hag on Aotrou, Doue beo ganeoh...
- 2) Plijet ganeoh, Aotrou Doue, digemer ar provou a ginnigom diwar ho tonezonou;
pegwir e roit deom, ho servicherien er bed-mañ, ar hras d'ober anezo
sakramant Korv ha Gwad Or Zalver, grit ma kavim gantañ
ar zilvidigez peurbaduz. - Drezañ, Jezuz Krist, Or Zalver. - R/ Amen.
- 3) Pedom oll a-unan... - Grit ma ray vad deom, Aotrou Doue,
an overenn on eus kemeret perz enni:
dreizi, e keit m'emaom o veva e-kreiz traou tremenuz ar bed,
e troit dija or halonou da gared madou an neñv, na dremenint ket,
ha da jom stag outo. Dre Jezuz Krist, or Zalver. - R/ Amen.

EIL SUL AN AZVENT

Bloavez C (6 a viz kerzu 1970)

Lennadenn Ia.- Pa glevom ar profed o rei kelou laouen
da Jeruzalem, sonjom, ni kristenien, emaom
e kêr Jeruzalem an amzeriou nevez: an Iliz eo.

PENNAD EUZ LEVR AR PROFED BARUK (5/1-9)

1. Tennit 'ta, Jeruzalem, ho tillad a gañv hag a zienez,
ha gwiskit warnoh splannder gloar Doue evid atao.
2. Da vantell en-dro deoh, lakit justis Doue,
da gurunenn war ho penn gloar an Hini peurbadel.
3. Rag emañ Doue o vond da ziskouez ho sked-c'hwi
da gement a zo dindan an oabl.
4. An ano-mañ a vo roet deoh gand Doue da viken:
Peoh ar justis, ha splannder doujans Doue.
5. En ho sav, Jeruzalem! sonn war an uhel, ha sellit ouz ar zav-heol:
gwelit ho pugale, dastumet euz ar zav-heol beteg ar huz-heol,
diwar gomz an Hini santel,
laouen oll o veza m'e-neus bet Doue sonj anezo.
6. Ho kuiteet o doa war droad, stlejet gand an enebourien;
digaset int en-dro gand an Aotrou,
douget gand enor evel bugale d'ar roue.
7. Rag grêt e-neus Doue e venoz (pe: e zonj)
izellaad peb menez uhel ha peb torgenn (pe: krehenn) oll-baduz,
ha stañka an traoniennou evid kompeza (pe: plênaad) an douar,
ma hello Israel kerzed dienkreiz dindan gloar Doue.
8. Ar hoajou zokén, hag ar gwéz c'hwéz-vad a beb seurd,
dre urz Doue, a roio disheol da Israel.
9. Evid gwir, bez' e vo Doue o tigas d'ar gêr Israel leun a levenez,
o rei dezo e hloar d'o sklerijenna,
e drugarez hag e justis d'o ambroug (pe: d'ober hent ganto).

SALM 125 / 1-2ab, 2cd-3, 4-5, 6.

Diskan: Traou kaer 'n-eus grêt Doue 'vidom,
E barr al levenez emaom.

1. P'e-neus an Aotrou digaset d'ar gêr tud divroet Sion,
e oa evidom evel eun huñvre.
- 2ab. C'hoarz laouen ganeom leiz or ginou, ha kan war or muzellou.
- 2cd. Neuze e lavare tud ar broiou payan:
"Ken kaer traou e-neus grêt an Aotrou evito!"
3. Ya, ken kaer traou e-noa grêt an Aotrou evidom,
hag edom e barr al levenez.
4. Digaset d'ar gêr, Aotrou, on tud prizoniet,
evel froudou dour en dezert.
5. Ar re a hade en eur skuill daelou, a ray an eost en eur gana.
6. Mond ha dond a reent en eur ouela, pa daolent had en douar;
dond a reont en-dro en eur dridal laouen,
pa zougont o dramou-ed a-vriadou.

Eil Lennadenn.- Mall e-neus sant Paol gweled e gristenien
divlam ha direbech a-benn donedigez Or Zalver.

PENNAD EUZ LIZER SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-FILIP (1/4-6, 8-11)

4. Va breudeur, e peb amzer, em oll fedennou,
e ran a galon laouen ar bedenn evidoh,
5. ablamour d'ar perz ho peus kemeret ganin en Aviel,
adaleg an deiz kenta beteg bremañ.
6. Fizians am eus e kement-mañ: an Hini e-neus boulhet ennoh al labour-se
a gaso anezañ da benn beteg devez ar Zalver Jezuz.

8. Doue a zo test evidon penaoz ho karan-c'hwi oll,
e kalon dener ar Zalver Jezuz.
9. Ha setu va fedenn: ra vezoh karget muioh-mui a garantez,
gand anaoudegez ho feiz
ha gand peb skiant evid dibaba ar pezh a zo ar gwella;
10. hag evelse, ra vezoh divlam ha direbech a-benn devez Or Zalver,
11. leun ho taouarn euz ar frouez a zoug eur vuez vad dre Jezuz Krist,
evid gloar ha meuleudi Doue.

SALUD D'AN AVIEL.- Alleluia! Eeunit an hent d'an Aotrou da zond;
peb den a welo ar Zalver.- Alleluia!

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ (3/1-6)

1. D'ar pemzegved bloaz ma oa Tiber Sezar impalaer (e Rom)
pa oa Pons Pilat gouarnour Bro-Judê, Herodez tetrark Bro-Halilê,
Filip, e vreur, tetrark broiou Iturê ha Trakonitiz,
Lysaniaz tetrark Bro-Abilen,
2. ha pa oa beleien vraz Annaz ha Kaifaz,
setu komz Doue roet da gleved da Yann, mab Zakariaz, er goueleh.
3. Dond a ra Yann eta, hag e kerz a-dreuz hag a-hed bro ar ster Jordan,
o prezeg eur vadiziant a binijenn, evid pardon ar pehejou,
4. evel m'eo skrivet e levr ar profed Izaiaz:
"Mouez eun den o krial er goueleh (pe: en dezert):
Kempennit an hent d'an Aotrou; eeunit dezañ e wenojennou.
5. Peb traonienn a vo stañket, peb menez ha peb torgenn a vo izelleet;
an heñchou kamm a vo eeunet, hag ar re skoselleg kompezet (pe: plêneet);
6. Ha peb den a welo ar zilvidigez euz a Zoue."

OREZONOU evid EIL SUL AN AZVENT

KEMPEDENN.- Pedom Doue...

Doue oll-halloudeg ha madelezuz,
grit ma ne vo soursi nag afer ebed euz ar bed-mañ
o herzel ouzom da vond en arbenn d'ho Mab en e zonedigez,
med grit ma vezim, o heulia kenteliou ar 'furnez euz an neñv,
lakeet da gaoud perz gantañ da viken:
Eñ on Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz...

WAR AR PROVOU -

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, ma hounezim ho trugarez
gand or pedennou hag or provou;
ha, pa'z eo re zister or meritou evid rei pouez d'or goulennou,
deuit d'or skoazella gand sikouriou ho madelez.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.- R/ Amen.

GOUDE KOMUNIA - Pedom oll a-unan...

Maget gand ar bara euz an neñv, ni ho ped, Aotrou Doue:
dre hrasou an overenn on eus bet perz enni,
deskit deom priza gand furnez traou ar bed-mañ,
ha trei or halon ouz madou ar baradoz.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.- R/ Amen.

TREDE SUL AN AZVENT

- Bloavez C - (13 a viz kerzu 1970)

Lennadenn Ia. - Doue e-unan a vo levenez vraz ennañ,
pâ vo salvet e gêr zantel hag e bobl a-bez.

PENNAD EUZ LEVR AR PROFED SOFONIAZ (3/14-18a)

14. Savit kanou joaiuz, merh Sion!
taolit youhadennou a levenez, Israel!
Bezit laouen ha tridit a greiz ho kalon, merh Jeruzalem!
15. Torret e-neus an Aotrou ar varnedigez a boueze warnoh,
argaset e-neus hoh enebourien;
roue Israel eo an Aotrou en ho kreiz,
n'ho po ket aon da gaoud mui rag droug ebed.
16. En deiz-se, e vo lavaret da Jeruzalem:
"Bezit heb aon, kêr Zion! na lezit ket ho taouarn da zinerza.
17. An Aotrou, ho Toue, a zo en ho kreiz, brezelour salver:
levenez vraz a vo ennañ ablamour deoh,
buez nevez a roio deoh en e garantez,
- 18a tridal a ray laouen evidoh, evel d'an devezioù gouel.

SALM euz Levr Izaiaz 12/2-3, 4bcd, 5-6.

Diskan: Kanit laouen ha joaiuz, tud Sion,
..... en ho touez 'mañ ar Zant a Israel.

2. Setu Doue va zilvidigez: fizians am eus, heb aon rag netra;
rag va nerz ha va hanaouenn eo an Aotrou, va zilvidigez eo.
3. C'hwi a denno dour gand levenez, euz feunteuniou ar zilvidigez.
4. Meulit an Aotrou ha brudit e ano,
roit da anaoud d'ar poblou e oberou kaer,
embannit pegen uhel eo e ano.

5. Kanit gloar d'an Aotrou evid e oberou kaer,
skignit ar vrud anezo dre an douar a-bez.
6. Tridit gand levenez, youhit (pe: hopit) laouen ha joaiuz, tud Sion,
rag braz eo, hag en ho touez emañ ar Zant a Israel.

Eil Lennadenn. - Euz e brizon e klevom sant Paol o lavared
"Bezit laouen". Selaouom ha sonjom ervad.

PENNAD EUZ LIZER SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-FILIP (4/4-7)

4. Va breùdeur, bezit laouen én Aotrou, or Zalver, bepred;
ya, c'hoaz eur wech e lavaran: Bezit laouen!
5. Ho puez vad ra vo sklêr evid an oll dud.
An Aotrou, or Zalver, a zo tost.
6. Arabad beza enkrezet gand seurd ebed;
med e peb digouez, a-bouez pedi hag aspedi, en eur drugarekaad,
kasit ho koulennou dirag Doue.
7. Ha peoh Doue, kalz dreist peb intent,
a ziwallo ho kalonou hag ho sperejou er Zalver Jezuz.

SALUD D'AN AVIEL. - Alleluia! Spered Doue warnon: gantañ on kaset
da brezeg ar helou mad d'ar re baour.

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ (3/10-18)

- (7) En amzer-se, e teue tud e-leiz da gaoud Yann Vadezour,
evid beza badezet gantañ,
10. hag e houlenne outañ: "Petra on eus da ober?"
11. Yann a responte dezo:
"An neb e-neus daou bez dillad, rei unan d'an hini a zò heb ket;
hag an neb e-neus bevans, rei lod ive."
12. Dond a ree publikaned ive (paotred an truañjou), evid beza badezet,
hag e lavarent dezañ: "Mestr, petra on eus-ni da ober?"
13. Hag e responte: "Na rit netra
en tu all d'ar pezh a zo merket deoh."
14. Soudarded ive a houlenne outañ: "Ha ni, petra raim?"
Eñ a lavare dezo: "Diwallit da wallgas (pe: da waska) den ebed,
pe da ziskuill e gaou, ha deoh da dremen gand ho pae."
15. O veza m'edo ar bobl war hed (pe: war hortoz),
ha m'en em houlenne an oll outo o-unan
daoust ha ne vefe ket Yann ar Zalver (pe: ar Mesiaz),
16. e lavare Yann d'an oll: "Me eo gand dour e vadezan ahanoh,
med emañ o tond an hini 'zo kreñvoh egedon,
ha n'on ket din da ziskoulma lerenn e zandalennou:
Eñ ho padezo er Spered Santel hag en tan.
17. En e zorn e vo ar bal-wenta (pe: ar bal-niza),
evid nêtaad e leuriad-ed,
ha dastum ar gwiniz en e hrignol (pe: en e zolier);
ar pell, avad, a daolo da zevi en eun tan ha ne varv ket."
18. Gand kalz a seurd kenteliou, ha re all c'hoaz,
eh embanne ar helou mad d'ar bobl.

KEMPEDENN.- Pedom Doue...

Aotrou Doue, pa welit ho pobl o hortoz gand feiz
gouel braz ginivelez Or Zalver,
grit deom, ni ho ped, digeri or halon da joaiou eur zilvidigez ken dispar,
evid ma raim gouel Nedeleg gand meuleudiou solanel,
er vrasa levenez bepred.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou, Doue beo ganeoh ha

WAR AR PROVOU.- Plijet ganeoh, Aotrou Doue, ma talhim bepred,
ni ho servicherien devot, da ginnig deoh ar zakrifis,
evid lida mister sakr an aoter, e-neus ho Mab lezet ganeom da ober,
hag evid sacha warnom grasou nerzuz ho zilvidigez.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.- Amen.

GOUDE KOMUNIA.- Pedom oll a-unan...

Ho madelez a bedom, Aotrou Doue:
sikouret gand ar magadur divin on eus resevet,
ra vim gwalhet euz or pehejou,
ha lakeet e stad da lida ar gouel braz a dosta.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.- Amen.

***** An destenn latin, evel ma lakom awechou, evid neb
a garfe trei gwelloc'h ha sklêrroh.

- 1) Deus, qui conspiciis populum tuum Nativitatis dominicae festivitatem
fideliter expectare, praesta, quaesumus, ut valeamus ad tantae salutis
gaudia pervenire, et ea votis sollemnibus alacri semper laetitia celebrare.
- 2) Devotionis nostrae tibi, Domine, quaesumus, hostia jugiter immoletur, quae
et sacri peragat instituta mysterii, et salutare tuum nobis potenter
operetur.

PEVARE SUL AN AZVENT

Bloavez C (20 a viz kerzu 1970)

Lennadenn Ia.- Doue a ro da houzoud, dre ar profed,
e teuio ar Zalver er bed e Betleem.

PENNAD EUZ LEVR AR PROFED MIKEAZ (5/1-4a).

1. Ha te, Betleem Efrata, kêrig dister e-touez mil kêr Bro-Juda,
euz da greiz e lakin da zevel an den a dle beza e penn Israel;
ar ouenn anezañ a zo euz a wechall, en amzeriou pella.
2. Rag-se e lezo Doue e bobl da veza er boan,
beteg ma vo deut, evid ar vaouez a dle kaoud eur mab,
ar mare d'e lakaad er bed;
ha neuze e teuio en-dro ar rest euz e vreudeur daved bugale Israel.
3. Eñ a vo sonn en e zav, evid ober e labour a bastor;
gantañ e vo nerz an Aotrou, ha gloar uhel-murbed e Zoue;
e dud dindannañ a vevo dienkrez,
rag eñ a vo braz beteg pennou pella ar bed.
- 4a. Hag eñ e-unan a vo ar Peoh.

SALM 79 / 2ac & 3b, 15-16, 18-19 - Da ziskan, unan euz p.57 "An Overenn",
pe diskan ar salm-mañ, gw. 4:

On lakit adarre war-zao, Aotrou Doue,
hag e vezim salvet.

2ac Pastor pobl Israel, selaouit; c'hwi, or pastor, diskouezit ho kloar;
3b diunit nerz ho kalloud, ha deuit d'or ziskour.

15. Doue, mestr ar bed, sellit euz lein an neñv,
ha deuit da weled ar winienn-mañ, bet plantet gand ho torn;
16. diwallit anezi, hag ar greskenn ho peus dibabet diwarni.

18. Ra vo ho torn war an den euz ho tibab (pe: euz ho choaz)
war mab an den kennerzet.
19. Biken mui ne dehim pell diouzoh: digasit buez ennom,
ha ni 'bedo hoh ano. (pe: ha ni 'vrudo hoh ano)

Eil Lennadenn.- Evid petra eo deut Mab Doue er bed?
Dreist peb tra, evid ober bolontez e Dad.

PENNAD EUZ AL LIZER D'AN HEBREED (10/5-10)

5. Va breudeur, en eur zond er bed, ar Zalver a lavar:
"N'eo ket fellet deoh kaoud na sakrifis na prov,
med eur horv ho peus stummet (pe: furmet) din.
6. Ar zakrifisou peurlasket hag ar re evid ar pehed
n'int ket bet plijet deoh.
7. Neuze am eus lavaret: Setu me o tond,
evel m'eo skrivet diwar va 'fenn e rolladenn al levr,
evid ober, va Doue, ho polontez."
8. Da genta e lavar ar Zalver:
"Sakrifisou ha provou, re beurlasket ha re evid ar pehed,
euz ar seurd a ginniger hervez Lezenn Moizez,
n'eo ket fellet deoh kaoud, ha n'int ket plijet deoh."
9. Goudeze e lavar: "Setu me o tond evid ober ho polontez."
Terri a ra velse ar stad kenta, evid sevel an eil.
10. Diwar ar volontez-se a Zoue, ez om bet, ni, santelleet
dre ar brovadenn (pe: an ofrans) euz korv Jezuz Krist
grêt gantañ eur wech evid atao.

OREZONOU PEVARE SUL AN AZVENT

KEMPEDENN.- Pedom Doue...

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, skuill ho kras en or halonou;*
ni hag on eus anavezet, dre zalud an El, mister ho Mab en em hrêt den,
heñchit ahanom, dre e basion hag e groaz,
beteg gloar an adsao da veo.
Drezañ, Jezuz Krist, or Zalver hag on Aotrou,* Doue beo ganeoh...

WAR AR PROVOU - War ar provou laket amañ war hoh aoter, Aotrou Doue,
ra ziskenno d'o zantellaad ar memez Spered Glan,
e-neus karget gand e vertuz korv sakr ar Werhez gloriuz Vari.
Ni ho ped dre Jezuz Krist, or Zalver.- Amen.

GOUDE KOMUNIA - Pedom oll a-unan...

Ho pedi a reom c'hoaz, Aotrou Doue, goude m'on eus bet,
er gomunion an arrez euz ar zilvidigez peurbaduz:*
seul vui ma tosta ar gouel a zigas deom ar Zalver,
grit deom mond war well gand seul vui a garantez,
evid lida e doare mister ginivelez ho Mab,
Jezuz Krist, or Zalver.- Amen.

***** Testenn latin (an hini genta eo hini an Anjelus: "Gratiam tuam...")

- 2) Altari tuo, Domine, superposita munera Spiritus ille sanctificet,
qui beatae Mariae viscera sua virtute replevit. Per Christum...
- 3) Sumpto pignore redemptionis aeternae, quaesumus, omnipotens Deus,
ut quanto magis dies salutiferae festivitatis accedit, tanto devotius
proficiamus ad Filii tui digne nativitatis mysterium celebrandum.

ALLELUIA! Ar Werhez a zougo, hag a hano eur mab,
hag a vo anvet Emmanuel, Doue-ganeom. - Alleluia!

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ (1/39-45)

- En amzer-se, war-lerh ar helou roet dezi gand an El,
39. Mari a zoeet en hent gand mall
warzu bro ar menezioù, d'eur gêr a Vro-Juda.
40. Antreal a ra e ti Zakariaz, ha saludi Elizabed.
41. Kerkent ha m'he deus Elizabed klevet ar zalud gand Mari,
e-neus tridet ar hrouadur en he hreiz,
hag eo bet karget Elizabed euz ar Spered Santel.
42. Savet he deus he mouez, da lavared a-bouez penn:
"Benniget oh-c'hwi dreist an oll wragez,
ha henniget eo ar frouez euz ho korv!
43. Hag a beleh e teu din kement-mañ:
mamm va Aotrou o tond beteg ennon?
44. Rag, kerkent ha m'eo deut mouez ho salud beteg va diskouarn,
e-neus ar hrouadur tridet em hreiz gand al levenez.
45. Evuruz an hini he deus bet feiz
ha kredet e vo sevenet penn-da-benn
ar homzou bet lavaret dezi a-berz an Aotrou Doue."

DERHENT NEDELEG - OVERENN AN ABARDAEZ

Lennadenn Ia.- En eur brometi ar zilvidigez, ar profed
a lavar d'e bobl: Doue a vo e blijadur ennout.

PENNAD EUZ LEVR AR PROFED IZAIAS (62/1-5)

1. Dre garantez evid Sion, ne jomin ket dilavar;
dre garantez evid Jeruzalem, n'am-mo ket ehan,
kén na skedo he justis evel ar goulou-deiz,
hag he zilvidigez par d'eun eteo tanflammet.
2. Ar broiou payan a welo da justis, hag an oll rouaned da hloar.
Eun ano nevez a vo roet dit diwar muzellou an Aotrou.
3. Bez' e vi eur gurunenn skeduz e dorn an Aotrou,
eur zeizenn-roue e dorn da Zoue.
4. Ne vi ket anvet mui "an hini dilezet", na da vro "an hini houlo";
anvet e vi "va flijadur enni", ha da vro "an hini eureujet";
rag an Aotrou a gavo e blijadur ennout,
ha da vro he do eur pried.
5. Ya, evel eur paotr o timezi d'eur plah yaouank,
an hini e-no da zavet a gemero ahanout da bried;
hag, evel m'e-neus eun den nevez levenez gand e bried,
da Zoue e-no levenez ganit.

SALM 88 / 4-5, 16-17, 27 & 29 - Diskan: Madeleziou 'n Aotrou Doue
..... a ganin-me da virviken. (gw. 2)

4. Eun emgleo am eus savet gand an den dibabet ganin,
touet am eus le da Zavid, va zervicher:
5. "Da viken e savin gouenn euz da wad,
ha da gador-roue a zalhin en e blomm a rumm da rumm."
16. Evuruz ar bobl a oar kana laouen ho meuleudi!
Aotrou Doue, ouz sklerijenn ho fas e kerzont,
17. gand hoh ano e tridont a-hed an deiz,
gand ho santelez peurvad ez eus lorh enno.
27. Eñ a zavo e vouez davedon: "Va zad oh-c'hwi,
va Doue, ha roh va zilvidigez."
29. Da virviken e virin dezañ va madelez,
ha didorr e chomo va emgleo gantañ.

Eil Lennadenn.- Sant Paol, en e brezeg, a ziskouez ez eo ar
Zalver mab da Zavid, evel m'e-noa prometet Doue.

PENNAD EUZ LEVR OBEROU AN EBESTEL (13/16-17, 22-25)

- Digouezet e kêr Antioch Bro-Bisidia, Paol a zo eet d'ar zinagog.
Pedet da lavared eur gêr bennag,
16. en em lak en e zav, ha gand e zorn e houlenn peoh:
"Tud euz pobl Israel, emezañ, ha c'hwi, tud a zoujans Doue, selaouit!
 17. An Doue a zo hini Israel e-neus bet choazet on tadou,
ha savet uhel ar bobl-se p'edo o veva war zouar Bro-Ejipt;
dre nerz e vreh, e-neus tennet anezo euz ar vro-se.
 22. Diwezatoh, e-neus lakeet David da veza roue warno,
ha da hemañ e-neus roet testeni kaer, en eur lavared:
"Kavet am eus David, mab Jesse, den hervez va halon,
an hini a raio peb tra diouz ma fell din."

23. Euz e lignez, evel m'e-noa prometet, Doue e-neus laket da zevel eur Zalver da Israel, ha Jezuz eo.
24. Evid digeri an hent d'e zonedigez, Yann e-noa prezeget da oll bobl Israel eur vadiziant a binijenn.
25. Erru da benn diweza e labour, Yann a lavare:
"Me n'on ket an hini a zonz deoh ez on,
med emañ o tond war va lerh,
eñ ha n'on ket din da ziskoulma sandalennou e dreid."

ALLELUIA! Warhoaz e vo lamet pehed an douar,
hag e vo roue warnom Salver ar bed.- Alleluia!

PENN KENTA AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE (1/1-25)

- pe 18-25 hebken -

1. Chadennad tadou Jezuz Krist, mab da Zavid, mab da Abraham.
2. Abraham a zo bet tad da Izaag, Izaag da Jakob,
Jakob da Juda ha d'e vreudeur.
3. Juda 'zo bet tad da Farez ha da Zara dre ar vaouez Tamar,
Farez tad da Esron, Esron da Aram,
4. Aram tad da Aminadab, Aminadab da Naason, Naason da Zalmon,
5. Salmon tad da Vooz dre ar vaouez Rahab,
Booz tad da Obed dre ar vaouez Ruth, hag Obed da Jesse.
6. Jesse a zo bet tad d'ar roue David,
ha David tad da Zalomon dre an hini a oa bet gwreg Uri.
7. Salomon a zo bet tad da Roboam, Roboam da Abiaz, Abiaz da Asaf,
8. Asaf tad da Jozafad, Jozafad da Joram, Joram da Oziaz,
9. Oziaz tad da Joatam, Joatam da Akaz, Akaz da Ezekiaz,
10. Ezekiaz tad da Vanase, Manase da Amon, Amon da Joziaz,

11. Joziaz tad da Jekoniaz ha d'e vreudeur, da vare an harlu e Babilon.
 12. Ha goude an harlu e Babilon, Jekoniaz a zo bet tad da Zalatiel,
Salatiel tad da Zorobabel,
 13. Zorobabel tad da Abiud, Abiud da Eliakim, Eliakim da Azor,
 14. Azor tad da Zadok, Sadok da Akim, Akim da Eliud,
 15. Eliud tad da Eleazar, Eleazar da Vatan, Matan da Jakob.
 16. Jakob a zo bet tad da Jozef, pried Mari,
an hini 'zo bet mamm da Jezuz, anvet Krist (ar Zalver).
 17. Bez' ez eus bet eta pevarzeg rummad euz Abraham beteg David,
pevarzeg euz David beteg an harlu e Babilon,
ha pevarzeg euz an harlu e Babilon beteg ar Zalver.
- *** Amani e kroger gand al lennadenn diverret.

18. Ganedigez Jezuz Krist a zo bet erruet evelhenn.
Pa oa Mari, e vamm, dimezet da Jozef, med a-barz m'o doa bevet asamblez,
eo bet anavezet e oa dougerez dre vertuz ar Spered Santel.
19. Jozef, he fried, den santel ha mad anezañ,
pa ne 'felle ket dezañ he dizenori,
e-neus laket en e benn en em zispartia diouti dre guz.
20. Troet e-neus ar zonzou-se en e spered,
pa zeu eun El d'an Aotrou da bara dirazañ e-kreiz e gousk,
o lavared dezañ: "Jozef, mab da Zavid, arabad deoh kaoud aon
o kemer Mari, ho pried, en ho ti,
pegwir ar pez a zo krouet enni a zo euz ar Spered Santel.
21. Genel a raio eur mab, a roiote dezañ an ano a Jezuz,
rag eñ eo a zalvo e bobl euz he fehejou."
22. Kement-se a hoarveze, evid ma teuje da wir
ar pez e-noa lavaret an Aotrou dre vouez ar profed:
23. "Setu e vo ar Werhez dougerez, hag e vo mamm d'eur mab,
a vo anvet Emmanouel, da lavared eo: Doue ganeom."

24. Jozef, goude beza savet, a ra neuze
evel m'e-neus lavaret dezañ El an Aotrou:
kemer a ra e bried en e di, hag he mired a ra gwerhez;
25. p'he deus-hi laket er bed eur mab, e ro dezañ an ano a Jezuz.

OREZONOU DERHENT GOUEL NEDELEG

KEMPEDENN. - Pedom Doue...

Aotrou Doue, beh bloaz e roit deom levenez o hortoz or zilvidigez;*
pa 'z om ken laouen o tigemer ho Mab unganet evel Salver,
roit deom ar hras d'e weled heb krena pa zeuy en-dro evel Barner:
Drezañ, Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,* Doue beo ganeoh ha...

WAR AR PROVOU -

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, ober deom digeri ar goueliou-mañ
gand seul vrasoh mall d'ho servicha,
ma rit deom gouzoud, dre or feiz,
ez eo boulhet labour or zilvidigez gand ginivelez ho Mab,
Jezuz Krist, or Zalver. - Amen.

GOUDE KOMUNIA - Grit, ni ho ped, Aotrou Doue, ma vim kennerzet
gand goueliou ginivelez ho Mab unganet,
eñ hag a ro deom evaj ha magadur en e zakramant santel:
Jezuz Krist, or Zalver. - Amen.

*** Er bajenn war-lerh, Orezonou an teir Overenn
*** euz Gouel Nedeleg.

I D'AR PELLGENT

Kempedenn

Aotrou Doue, an nozvez santel-mañ ho peus karget a sklêrder
gand sked (pe: splannder) an Hini a zo ar wir sklerijenn deut er bed;
grit deom, ni ho ped,
goude beza anavezet war an douar misteriou ar Sklerijenn-se, or Zalver,
kaoud on dudi gantañ e levenez ar baradoz.
Drezañ, Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,* Doue beo...

WAR AR PROVOU

Ra blijo deoh, Aotrou Doue, or provadenn (pe: or zakrifis)
da geñver ar gouel-mañ;
ha grit, dre vertuz an overenn zantel, ma vim kavet tenna d'an Hini
a zo ennañ on natur-ni unanet ganeoh:
Jezuz Krist, or Zalver. - Amen.

Goude komunia

Ho pedi a reom, Aotrou Doue, ni hag a zo joa ennom
oh ober gouel ginivelez Or Zalver,
ma hellim, dre eur vuez vad, goñnid ar hras da veza unanet
ha da veza lodeg gantañ da viken:
Eñ, Jezuz Krist, or Zalver. - Amen.

II D'AR GOULOU-DEIZ

- 1) Doue oll-halloudeg, pa'z eo skuillet warnom hirio
sklerijenn nevez ho Mab en em hrêt den,
grit ma teuo kement a sked en or spered dre ar feiz
da splanna ivez en on oberou. Dre Or Zalver J.K., ho Mab...
- 2) Plijet ganeoh, Aotrou Doue, ma vo or provou a zoare
evid overenn ginivelez ho Mab;
evel ma'z eo eñ, ganet hirio evel den, leun a hloar evel Doue,
evelse ive ra zeuio deom, dre ar madou-mañ euz an douar,
donezon ar vuez divin. Dre Jezuz Krist, or Zalver.- Amen.
- 3) Aotrou Doue, p'emaom er joa oh ober gouel ginivelez ho Mab,
grit deom anaoud, gand feiz gwirion, sekrejou ar mister-se,
ha, muioh c'hoaz, kaoud karantez birvidig evitañ:
Jezuz Krist, or Zalver.- Amen.

III OVERENN AN DEIZ

- 1) Aotrou Doue, c'hwi ho peus krouet ken kaer natur mab-den,
ha kaerroh c'hoaz ho peus he savet a-nevez;*
grit deom, ni ho ped, kaoud perz e buez-Doue an Hini a zo plijet
gantañ kemer on natur-den: Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab...
- 2) Ra blijo deoh, Aotrou Doue, or provadenn er gouel braz-mañ,
pa'z eo deut ho Mab er bed evid kinnig deoh ar zakrifis
on eus dreizañ ar zilvidigez hag ar peoh ganeoh-c'hwi,
hag a ro tro deom d'hoh adori ervad. Dre J.K. or Zalver.- Amen.
- 3) Doue madelezuz, setu or pedenn bremañ: Salver ar bed ganet hirio,
kenkoulz ha ma ro deom galloud da veza ho pugale,
ra zigaso deom ive donezon ar vuez divarvel.
Eñ on Doue beo, a oll viskoaz da virviken.- Amen.

OVERENN HANTER-NOZ

- I.- PENNAD EUZ LEVR AR PROFED IZAIAS (9/1-6) - Ar Zalver a vo Roue ar peoh.
- Ar bobl a gerze en deñvalijenn he deus gwelet eur sklerijenn vraz;
an dud a oa o chom er vro deñval a zo paret an deiz warno.
Kresket ho peus al levenez, joa vraz ho peus skuillet.
Emaint o tridal dirazoh gand levenez,
evel an eosterien pa vez echu an eost,
evel ar zoudarded eet an treh ganto, pa rannont etrezo ar preiz dastumet.
Rag ar yeo a boueze war o choug, ar vaz a vloñse o diouskoaz,
ar wialenn a skoe ganto evid o bounta d'al labour,
kement-se ho peus torret, evel d'an deiz ma oa bet trehet Madian.
Ar boutou pounner a lake an douar da dregerni,
ar mantilli ruziet gand gwad,
setu int devet, loñket gand an tan.
- Ya! pegwir eur hrouadur a zo ganet evidom,
eur mab 'zo roet deom;
merk e halloud war e skoaz, evel-henn e vo anvet:
Kuzulier burzuduz, Doue kreñv,
Tad da viken, Roue ar peoh.
- War astenn ez aio e halloud, ha ne vo fin ebéd kén d'ar peoh
war gador David hag en e rouantelez.
Stard e vo harpet war ar gwir hag ar justis, a vremañ da virviken.
Setu petra 'vo grêt gand karantez entanet an Aotrou, mestr ar bed.

+++++

SALM 95.- Diskan: Eur hrouadur, Mab karet an Tad, (Ton gand A. Sez nec)
War an douar, 'vidom-ni hirio 'zo ganet.

pe: Eur Zalver hirio 'zo ganet deom: an Aotrou Krist eo.

1. Savit d'an Aotrou Doue eur han nevez,
Meulit an Aotrou dre bevar horn ar bed,
Roit meuleudi d'an Aotrou ha mil bennoz d'e ano.
2. Bemdez, roit da anaoud e zilvidigez,
Grit brud d'e hloar etouez broadou an douar,
D'an oll boblou displegit e vurzudou.
3. Ra vo laouen an neñvou, ra drido kalon an douar,
ra zavo trouz ar mor gand kement tra 'zo ennañ,
ra vo beuzet ar mêziou e-kreiz an dudi.
4. Ra hejo gand ar joa skourrou gwez ar hoajou,
o weled an Aotrou a zo o tond,
rag dond a ra evid lakad an douar dindan e halloud.

Eil Lennadenn.- PENNAD EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA DITIZ. (2/11-14)

Gras madelezuz Doue a zo deut er sklerijenn,
karget a zilvidigez evid an oll dud.
Deski a ra deom trei kein d'ar pehed ha da hoantegeziou ar bed,
evid beva war an douar-mañ hervez ar furnez, ar justis
hag an doujañs da Zoue,
en eur hortoz an eürusted a esperom
ha donedigez leun a hloar Jezuz Krist, on Doue braz hag or Zalver.
Eñ e-neus en em roet evidom, evid or prena euz peb pehed
hag on lakad glan, evid beza e bobl karet, douget d'an oberou mad.

ALLELUIA (bis).- Kelou laouen a zigasan deoh:
Hirio 'z eus ganet deoh eur Zalver,
An Aotrou Krist eo ar bugel-se. - ALLELUIA.

PENNAD EUZ AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT LUKAZ. (2/1-14)

En amzer-se, e oa deut urz a-berz an impalaer Aogust da niveri oll dud
ar bed. An niveradur kenta-se a voe grêt pa oa Kiriniuz gouarnour Bro-Siria.
Mond a ree an dud da rei o ano, pep hini en e gêr.

Jozef ive, euz Nazared e Bro-Halilea, a oa pignet da Vro-Judea, beteg
kêr David, anvet Betleem, pegwir e oa euz ti ha famill David, evid rei e ano,
gand Mari, e bried, a oa dougerez.

Epad m'edont eno, setu deut an amzer dezi da henel he bugel. He Mab
kenta-ganet he deus neuze laket er bed, mailluret ha laket da hourvez en eur
hraou, dre ma ne oa ket a blaz evito en ostaleri.

Pastored a oa er mêziou tro-war-dro, o veilla 'hed an noz da ziwall o
deñved. Ha setu eun El a-berz Doue en em ziskouez dezo, ha gloar Doue a daol
sklerijenn en-dro dezo, hag int da veza spontet.

An El a lavar dezo: "Chomit heb aon, rag kelou a zigasan deoh euz eul
levenez vraz, a vo evid ar bobl a-bez: eur Zalver a zo ganet deoh hirio e kêr
David; ar Mesiaz eo, an Aotrou. Ha setu ar merk a raio deoh e anaoud: c'hwi
'gavo eur hrouadurig mailluret ha gourvezet en eur hraou."

Ha neuze, en eun taol, e teu da heul an El eun niver braz a Eled euz an
neñv, oll o veuli Doue en eur lavared: "Gloar da Zoue e barr an neñvou,
ha peoh war an douar d'an dud a blij dezañ."

OVERENN GOULOU-DEIZI.- PENNAD EUZ LEVR AR PROFED IZAIAS (62/11-12) - Setu ho Salver o tond.-

Selaouit ar gomz a gas an Aotrou beteg pennou pella ar bed:

"Lavarit d'ar verh Sion: Setu ho Salver o tond;

setu d'e heul frouez an treh e-neus gonezet,

ha dirazañ ar madou e-neus dastumet d'e breiz.

C'hwi vo anvet: Pobl santel,

ar re brenet gand an Aotrou;

ha te, kêr Sion, a vo anvet: "an hini c'hoanteet",

"ar gêr n'eo mui dilezet".

+++++

SALM 96.- Diskan: Sklerijenn splann hirio a bar warnom:

..... Eur Zalver evidom a zo ganet.

1. D'an Aotrou eo ar rouantelez! (pe: Roue eo an Aotrou!)
Ra drido kalon an douar! Levenez d'an inizi pella!

2. Moueziou an neñv a embann santelez Doue,
hag an oll boblou a dro o zellou da weled e hloar.

3. Savet eo ar sklerijenn evid an dén just,
hag al levenez evid an dén 'zo eeun e galon.

4. Bezit laouen, tud just, abalamour d'an Aotrou;
kanit meuleudi ha trugarez d'e ano santel.

+++++

Eil Lennadenn.- PENNAD EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA DITIZ. (3/4-7)

Va mab kêr, setu diskouezet dirazom madelez Doue or Zalver hag e garantez ouz an dud. N'eo ket evid talvoudegez an oberou mad grêt ganeom, med abalamour d'e drugarez e-neus or zaveteet.

Or gwelhet e-neus dre zakramant an dour, ar vadiziant, a ra ahanom bugale da Zoue hag a zigas ennom gras ar Spered Santel.

Ya, skuillet e-neus ennom e Spered, dre Jezuz Krist, or Zalver, evid ma vezim santelleet dre e hras, ha ma vezim, hervez an esperañs, heritourien d'ar vuez peurbaduz, en Or Zalver Jezuz Krist.

ALLELUIA.(bis) - Gloar da Zoue e barr an neñvou,
ha peoh war an douar d'an dud a blij dezañ.- ALLELUIA.

PENNAD EUZ AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT LUKAZ. (2/15-20)

Goude ma oa tehet an Elez diwar o zro, ar bastored a gomze etrezo: "Deom beteg Betleem, da weled ar pezh a zo c'hoarvezet, ar pezh a zo bet diskleriet deom gand an Aotrou." Mond a reont buan, hag e kavont Mari ha Jozef, gand ar hrouadur gourvezet er hraou.

Goude beza gwelet, e reont da houzoud ar pezh a oa bet lavaret dezo diwarbenn ar hrouadur-se. Ha kement hini a gleve a oa souezet gand ar pezh a gonte dezo ar bastored.

Mari a zalhe mad an oll draou-se en he halon, hag a zoñje enno. Hag ar bastored, en eur vond kuit, a rente gloar ha meuleudi da Zoue, evid kement o doa gwelet ha klevet, hervez ma oa bet lavaret dezo.

I.- PENNAD EUZ LEVR AR PROFED IZAIAS. (52/7-10) - Ar helou mad.

Pegen kaer eo gweled o redeg war ar menezioù
ar hannad a zoug kelou ar peoh,

paotr ar helou mad, a embann kelou ar zilvidigez,
hag a zeu da lavared d'ar gêr zantel: "Roue eo ho Toue!"

Klevit mouez ar hedourien war beg an tour:
sevel a reont o mouez, oll a-unan e kront laouen,
rag o daoulagad a wel an Aotrou o tistrei da gêr Sion.
Bezit laouen, ha kanit ho plijadur, c'hwi Jeruzalem ar gêr diskaret,
rag an Aotrou a gemer truez ouz e bobl, dasprena 'ra Jeruzalem.
Diskouezet e-neus an Aotrou nerz e vreh santel a-wel d'an oll boblou.
Euz an eil penn d'egile d'an douar, e welo an dud silvidigez on Doue.

SALM 97.- Diskan: An douar a-bez e-neus gwelet
..... ar Zalver roet deom gand Doue.

1. Savit d'an Aotrou eur han nevez,
rag burzudou dispar e-neus grêt.
2. An Aotrou e-neus roet da anaoud e zilvidigez,
a-wel da vroadou an douar e-neus diskouezet e justis.
3. Dalhet e-neus soñj euz e vadelez e-keñver Israel
hag euz gwirionez e bromesa.
4. Beteg pennou pella an douar
eo bet gwelet silvidigez on Doue.
5. Savit ho mouez en enor d'an Aotrou, oll boblou ar bed,
bezit laouen ha kanit a wir galon.
6. Sonit en enor d'an Aotrou war an delenn,
kanit a vouez uhel dirag an Aotrou, ar roue!

Eil Lennadenn.- PENNAD KENTA EUZ AL LIZER D'AN HEBREED. (1/1-6)

Meur a wech hag e meur a hiz e-noa Doue, gwechall, komzet ouz on tadou
dre ar brofeted. En amzer diweza, e-neus komzet deom dre e Vab. Hemañ eo e-neus
lakeet da heritour war beb tra, ha drezañ eo e-neus krouet ar bed.

Ar Mab-se, ar sked euz e hloar, heñvel outañ dre natur, a zoug peb tra
krouet dre nerz e gomz. Goude beza gwalhet ar pehejou, emañ azezet en neñv
a-zeou d'an Doue uhel-murbed. Kement eo savet dreist an Elez, evel m'e-neus
bet digand e Dad eun ano kalz uhelloc'h eged o hini.

Rag da behini euz an Elez e-neus Doue lavaret biskoaz: "C'hwi zo va Mab,
hirio ez oh ganet ganin"? Ha c'hoaz: "Me 'vo dezañ da Dad, hag eñ a vo din
da Vab". Ha pa zigas e Vab unganet er bed, e lavar: "Ra stouo d'e adori
oll Elez Doue".

ALLELUIA.(bis).- Eun deiz santel a bar warnom;
poblou ar bed, deuit d'adori an Aotrou.
Eur sklerijenn vraz hirio
'zo diskennet war an douar.- ALLELUIA.

PENNAD KENTA AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT YANN. (1/1-18)

- E leh "ar Gomz", e heller
lavared "ar Verb". -

Er penn kenta edo ar Gomz, hag ar Gomz a oa gand Doue,
hag ar Gomz a oa Doue. Er penn kenta edo gand Doue.
Drezañ eo bet grêt peb tra, hag hebdañ n'eus bet grêt netra.
Kement a zo bet grêt ennañ a oa buez, hag ar vuez 'oa sklerijenn an dud.
Ar sklerijenn a lugern e-kreiz an deñvalijenn,
hag an deñvalijenn n'he deus ket harzet outi.
Bez' ez eus bet eun den digaset gand Doue, a oa Yann e ano.
Deut e oa evid beza test, evid rei testeni d'ar sklerijenn,

evid dougen an oll da gredi drezañ.

Ne oa ket hennez ar sklerijenn, med evid rei testeni d'ar sklerijenn e oa.
Ar Gomz a oa ar sklerijenn wirion, a bar war beb den en eur zond er bed.

Bez' e oa er bed, hag ar bed 'zo bet grêt gantañ,

ha n'eo ket bet anavezet gand ar bed.

Deut eo etouez e dud, hag e dud n'o deus ket grêt digemer dezañ.

Med d'ar re o deus e zigemeret, d'ar re a gred en e ano,

e-neus roet galloud da veza bugale da Zoue;

ar re-ze n'int ket ganet euz ar gwad, na diwar youl ar hôrv,

na diwar bolontez mab-dén, med euz Doue eo int ganet.

Hag ar Gomz a zo deuet da veza dén, ha deut eo da jom en on touez.

Ha ni on eus gwelet e hloar, an hini a zo dezañ evel Mab unganet an Tad,

leun a hras hag a wirionez.

(Amañ e heller krenna al lennadenn.)

Yann Vadezour a zoug testeni diwar e benn hag a lavar a vouez kreñv:

"Hemañ eo an hini a lavaren: An hini a zo o tond war va lerh a zo bremañ
dirazon, rag bez' e oa anezañ araozon."

Ni on eus bet oll euz e leunder, ha gras goude gras.

Al Lezenn a oa bet roet dre Voizez,

med ar hras hag ar wirionez a zo deut dre Jezuz Krist.

Dén ebéd n'e-neus gwelet Doue biskoaz,

ar Mab unganet, hag a zo e kalon an Tad, e-neus roet anezañ da anaoud.

- D'ar zul goude Nedeleg - (27 a viz Kerzu 1970)

Lennadenn Ia.- Eürusted an tiegeziou a vir lezenn Doue.

PENNAD EUZ LEVR AR FURNEZ GAND MAB SIRAH (gresian. 3/2-6, 12-14)

2. Doue e-neus lavaret d'ar vugale enori o zad,

ha d'ar mibien senti ouz o mamm.

3. Neb a enor e dad a bae d'e behejou;

4. neb e-neus doujans d'e vamm a zo evel an hini a zastum eun teñzor.

5. Neb a enor e dad a gavo joa gand e vugale,

ha da zeiz e bedenn e vo selaouet.

6. Neb e-neus doujans d'e dad e-no buez hir,

ha senti 'ra ouz Doue neb a ra dudi e vamm.

12. Va mab, ro skoazell d'az tad pa vo koz;

na ro ket poan dezañ 'pad ma vo beo.

13. Ha pa ve falleet e benn, bez mad evitañ,

diwall d'ober fae warnañ p'emaout-te e barr da nerz.

14. Rag ar vadelez e-keñver an tad ne vo ket ankoueet (pe: ankounaheet),
hag e-leh ar pehejou, e talvezo digoll evidout.

SALM 127 / 1-2, 3, 4-5.- Diskan: Eüruz an hini... pe: Kaer ha plijuz meurbed...

1. Evuruz neb a vev e doujañs Doue, hag a heuil an heñchou merket gantañ.

2. Diwar labour da zaouarn az po da zebri; evuruz e vi, ha brao 'vo dit beva.

3. Da wreg, e diabarz da di, 'zo par d'eur winienn karget a frouez;
da vugale en-dro d'an daol, par d'ar gwez-olivez yaouank.

4. Ya, evelse e teu bennoz d'an den a zoujans Doue.
5. Ra vi benniget gand an Aotrou, euz lein kêr Zion, bemdez 'hed da vuez.

Eil Lennadenn.- An Abostol a ziskouez penaoz rén ar
vuez pa vezer asamblez, dreist-oll en tiegez.

PENNAD EUZ LIZER SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-GOLOS (3/12-21)

12. Va breudeur, pa'z oh tud dibabet gand Doue, santelleet ha karet gantañ, bezit leun a druez, a vadelez, a izelded, a zouster, a basianted;
13. en em houzañvit ha pardonit an eil d'egile,
m'e-neus unan bennag leh da glemm euz eun all;
evel m'e-neus an Aotrou pardonet deoh, grit kemend all.
14. Dreist peb tra, bezit leun euz ar garantez,
skoulm an oll vertuziou.
15. Peoh Or Zalver da rén en ho kalonou,
ar peoh m'oh bet galvet d'e gaoud o veza eur horv hebken,
ha diskouezit anaoudegez vad.
16. Komz Or Zalver ra jomo ennoh beo-buezeg;
e peb furnez, roit an eil d'egile kenteliou hag aliou;
gand salmou, himnou ha kantikou santel,
kanit a greiz kalon ho trugarez da Zoue.
17. Ha petra bennag a rit, dre gomz pe dre ober, grit peb tra
en ano an Aotrou Jezuz, o trugarekaad drezañ Doue an Tad.
18. C'hwi, ar merhed, bezit doujuz d'ho kwazed,
evel m'eo deread er Zalver. (pe: en Aotrou Krist)
19. C'hwi, ar wazed, karit ho priejou, ha na vezit ket kaled evito.
20. C'hwi, bugale, sentit ouz ho tud e peb tra,
rag an dra-ze a blij da Zoue én Or Zalver.
21. Tadou, arabad hegasi ho pugale, gand aon na gollfent kalon.

ALLELUIA! Peoh Or Zalver da rén en ho kalonou;
Komz Or Zalver da jom ennoh beo-buezeg.- Alleluia!

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ (2/41-52)

41. Kerent Jezuz a ree beaj Jeruzalem, beb bloaz evid gouel braz ar Pask.
42. P'e-neus bet Jezuz e zaouzeg vloaz, ez int pignet da Jeruzalem
evel ma oant boazet, evid ar gouel.
43. Echu ganto o derveziou, o deus kemeret hent ar gêr,
med ar paotr Jezuz a zo chomet e Jeruzalem, heb gouzoud d'e dud.
44. Kredi a reont emañ gand ar re all euz ar gompagnunez,
hag evelse e reont eun derveziad hent;
neuze e klaskont war e lerh, e-touez o zud kar hag o anaoudegez.
45. Chomet berr d'e gavoud, e teuont war o hiz da Jeruzalem,
da vat ouz e glask.
46. Ha setu goude tri devez, e kavont anezañ en Templ,
azezet e-kreiz an doktored, o selaou hag oh ober goulennou.
47. Kement hini a glev anezañ a jom souezet gand e skiant hag e respoñchou.
48. Ouz e weled, e dud a zo estlammet, hag e vamm a lavar dezañ:
"Va mab, perag ho peus grêt an dra-ze deom?
Setu edom, ho tad ha me, ankeniet braz ouz ho klask."
49. Eñ a lavar dezo: "Petra ho poa da glask ahanon?
Ha ne ouieh ket e tlean beza e ti va zad?"
50. E dad hag e vamm o-unan n'int ket evid intent
ar pezh e-neus lavaret dezo.
51. Diskenn a ra ganto euz Jeruzalem, evid distrei da Nazared,
ha dalhmad e chom sentuz outo.
Hogen, e vamm a vire an oll draou-se en he halon.
52. Jezuz, eñ, a greske e peb doare: furnez, ha korv, ha gras,
dirag Doue ha dirag an dud.

OREZONOU GOUEL AR FAMILL ZANTEL

Kempedenn

Aotrou Doue, skoueriou kaer a zo bet plijet ganeoh
diskouez deom e buez ar Famill zantel;*

grit deom kerzed war he roudou,

gand vertuziou an tiegez hag ar garantez evid an nesa,
evid digouezoud eun deiz ganti e levenez ho ti,
da dañva an eürusted peurbaduz.

Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou, Doue beo...

War ar provou

Ar zakrifis da hounid ho trugarez a ginnigom, Aotrou Doue,
en eur houlenn diganeoh,

gand sikour pedennou ar Werhez Mamm da Zoue, ha re sant Jozef,
mired or famillou stard en ho kras hag er peoh.

Dre Jezuz Krist, or Zalver.- Amen.

Goude komunia

Maget ganeoh er zakramant santel, ni ho ped, Tad madelezuz:

grit deom heulia dalhmad skoueriou ar Famill zantel,

evid ma hellim, war-lerh trubuilhou ar vuez-mañ,

kaoud lod ganti en eürusted peurbaduz.

Dre Jezuz Krist, or Zalver.- Amen.

Lennadenn Ia..- Goude pehed an den kenta, Doue a ro
ar helou kenta euz ar zilvidigez, a zo da zond
dre ar vaouez, da lavared eo ar Werhez Vari.

PENNAD EUZ LEVR PENN KENTA AR BED (3/9-15, 20)

- Goude m'e-noa dizentet Adam ouz Doue,
9. an Aotrou Doue e-neus e halvet d'e gaoud: "E peleh emaout?"
10. Hag an den da respont: "Klevet am eus trouz ho pale el liorz,
hag am eus bet aon, o veza m'emaon e noaz, hag on eet da guzad."
11. Doue adarre: "Piou 'ta e-neus roet dit da anaoud emaout e noaz,
nemed ha debret az pefe euz ar wezenn am moa divennet ouzit?"
12. An den a respont: "Ar vaouez ho peus laket din em hichen,
hi he deus roet din euz frouez ar wezenn, hag am eus debret."
13. An Aotrou Doue a lavar d'ar vaouez: "Petra ho peus grêt?"
hag e respont ar vaouez: "An naer e-neus touellet ahanon,
hag am eus debret."
14. Neuze e lavar an Aotrou Doue d'an naer:
"Ablamour m'az peus grêt kement-se, e vezi milliget
e-touez an oll anevaled hag e-touez oll loened ar mêziou;
en em stleja 'ri war da gov, ha douar a lonki a-hed da vuez.
15. Enebiez a lakin etrezout hag ar vaouez, etre da lignez hag he lignez;
he lignez a 'flastro dit da benn,
ha te a dago anezi en he zeul (pe: d'ar zeul)."
20. Adam e-neus anvet e wreg Eva,
o veza m'eo bet mamm an oll dud veo.

SALM 97 / 1, 2-3ab, 3cd-4.- Diskan: Ken kaer traou e-neus grêt Doue!
.....
(pe: Pegen kaer ez eo Mamm Jezuz...)

1. Savit d'an Aotrou eur han nevez, ken kaer traou e-neus grêt.
An treh e-neus gounezet, diwar nerz e zorn hag e vreh santel.
2. An Aotrou e-neus roet da anaoud e zilvidigez,
a-wel d'ar poblou payan e-neus diskouezet e justis.
- 3ab. Dalhet e-neus sonj, e-keñver Israel,
euz e vadelez hag euz gwirionez e bromesa.
- 3cd. Ar pennou pella euz an douar o deus gwelet silvidigez on Doue.
4. Savit ho mouez en enor d'an Aotrou, oll boblou an douar,
lakit da darza ho youhadennou laouen, ha kanit a wir galon.

Eil Lennadenn.- Anavezet om bet gand Doue a-viskoaz

ha dibabet gantañ evid kaoud ar zilvidigez
dre e Vab.

PENNAD EUZ LIZER SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-EFEZ (1/3-6, 11-12)

3. Meulet ra vo Doue, Tad Jezuz Krist, on Aotrou!
Euz lein an neñv, e-neus karget ahanom
a beb seurd bennoziou speredel én Aotrou Krist.
4. Er Zalver-se e-noa choazet ahanom a-barz ma oa krouet ar bed,
evid beza santel ha dinamm dirazañ, er garantez.
5. Divizet e-noa a viskoaz ober ahanom e vugale,
dre Jezuz Krist hag evid beza unanet gantañ,
ha kement-se hervez m'eo bet plijet gand e vadelez,
6. evid rei tro da veuli splannder ar hras dispar
e-neus roet deom, dre garantez nemedkén, én e Vab karet.

11. En Aotrou Krist ez om bet kemeret da veza e bobl,
merket ma oam a viskoaz,
dre volontez an hini a zigas da wir kement tra 'fell dezañ,
12. evid beza eur veuleudi d'e hloar,
ni hag a oa, abaoe pell amzer, on esperans er Zalver.

ALLELUIA! Me ho salud, Mari, leun a hras; An Aotrou Doue 'zo ganeoh;
benniget oh dreist an oll wragez. - Alleluia!

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ (1/26-38)

26. En amzer-se, e oa bet kaset an El Gabriel gand Doue
d'eur gêr a Vro-Halile anvet Nazared,
27. da gaoud eur plah yaouank dimezet d'eun den anvet Jozef, euz lignez David,
hag ano ar plah yaouank a oa Mari.
28. Erruet beteg enni, an êl a lavar: "Me ho salud, leun a hras,
an Aotrou 'zo ganeoh."
29. Hi a zav strafuill enni o kleved seurd komzou;
sonjal a ra ganti heh-unan petra 'hell beza ar zalud-se.
30. An êl a lavar dezi: "Na gemerit ket aon, Mari,
rag plijet oh Zoue.
31. Setu emach o vond da gonsevi, hag e viot mamm d'eur mab,
a roiot dezañ an ano a Jezuz.
32. Hennez a vo braz, hag anvet e vo Mab da Vestr an neñv;
an Aotrou Doue a roio dezañ kador-roue (pe: tron) David e dad;
33. roue e vo war lignez Jakob da viken,
hag e rouantelez ne vo fin ebed dezi."
34. Lavared a ra Mari d'an êl: "Penaoz e hoarvezo kement-se?
Gwerhez on hag e choman."
35. Respont a ra an êl dezi: "Ar Spered Sanfel a ziskenno warnoh,
ha galloud Mestr an neñv a holoio ahanon.

Dre-ze, ar hrouadur a vo santel, ha mab da Zoue e vo anvet.
36. Ha setu Elizabed, a zo kar deoh, he deus konsevet ive,
daoust d'he oad, hag ar hwehved miz eo eviti,
goude ma lavarar ne vo morse mamm.

37. Rag Doue n'eus netra dreist e halloud."

38. Mari a lavar neuze: "Setu amañ servicherez an Aotrou:
ra vo grêt din evel m'ho peus lavaret."
Hag an êl a ya kuit diouti.

470 OREZONOU GOUEL MARIA GERZU *****

1) Aotrou Doue, gand krouidigez dinamm ar Werhez Vari
ho-peus kempennet kaerra lojeiz da rei digemer d'ho Mab;*
pegwir, en eur weled dija meritou maro ar Zalver,
ho-peus miret anezi da veza saotret gand pehed ebed,
grit, ni ho ped, ma hellim, ni ivez, dre zikour he fedennou,
beza nêt a behed hag erruoud beteg ennoh.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou, Doue beo...

2) Ar zakrifis a zilvidigez a ginnigom deoh, Aotrou Doue,
da geñver gouel ar Werhez Vari konsevet dinamm;
plijet ganeoh e zigemer ha rei deom ar hras-mañ:
evel ma tiskleriom en or feiz eo bet-hi miret ganeoh a beb pehed,
ra vezim-ni, dre zikour he fedennou, dizammet euz or pehejou.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.- Amen.

3) Ar zakramant santel on-eus resevet, Aotrou Doue,
ra bareo ennom an droug grêt gand ar pehed,
ho-peus diwallet dioutañ ar Werhez Vari konsevet dinamm.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.- Amen.

LABOUR GRET ha LABOUR DA OBER

Labour KENVREURIEZ AR BREZONEG n'emañ ket hebkén er Haierou a embannom.
Bez' emañ ive war an dachenn, tachenn on tud er parrezioù, 'leh ma 'z eus
da vrouda ha da zikour beleien ha tud fidel da lida overennou e brezoneg.
Kalz a zo bet grêt, meur a barrez a zo bet gounezet, med kalz brasoh eo ar
pez a jom da ober, evid m'e-no ar brezoneg kement a blas ha ma hellfe,
kement ha ma tlefe kaoud en on ilizou, e buez relijiel or pobl.

Pour que la liturgie en langue bretonne puisse continuer à progresser
pour le plus grand profit spirituel de notre peuple bretonnant, nous n'hési-
tons pas à poursuivre l'effort d'élaboration des matériaux nécessaires à
cette liturgie.

Le programme est d'une ampleur qui découragerait des ouvriers plus nom-
breux et mieux armés que nous, s'il fallait le réaliser d'un seul bloc. Nous
voyons les traducteurs français se donner deux ans pour traduire le nouveau
Missale Romanum, publié à Rome au début de juin 1970. Cet ouvrage monumental,
avec ses 966 pages, est une source d'eau vive quasi inépuisable. Nos textes
déjà traduits de l'ordinaire de la Messe, qui en font partie, n'en représen-
tent guère que le dixième. Nous y avons puisé aussi nos textes d'oraisons
depuis le 17e dimanche ordinaire (fin juillet). Progressivement, mais sans
fixer d'échéance, nous mettrons tout ce trésor à votre disposition.

Quant aux lectures de la Parole de Dieu, nous amorçons, en ce n° XI,
l'année C du cycle triennal, où l'Evangile sera tiré principalement de saint
Luc, comme il l'était de s. Marc pour l'année B. Nous serons fidèles aux
mêmes principes de traduction, déjà exposés dans notre n° II (Janvier 1970).

P.J. Nédélec